

# Dellou mad da Zoudarded Breiz

*lili arc'hantet ho cellise*

Ton : *Jesus dulcis memoria.*

## Diskar

Dellou mad deoc'h, mignoun soudard  
 A zifen Franz hirio ken stard,  
 A-eneb ar Prusian kriz  
 A glask he diskar n'he valis.

*(oe's)*  
*dalc'h-mad*  
*(3) noz-deiz*

Gouzout a reomp, bras <sup>1</sup>(ho) anken, ~~hozh...~~  
 Pell dioc'h ho re var an dachen ;  
 Ho korf paour <sup>2</sup>(a zo) en danger, ~~hozh...~~  
 (<sup>3</sup>Bepred) goanet gant ar vizer. ~~noz-deiz~~

### 2

Klevet a rit ar boulejou  
 Dislounket gant ar c'hanoliou  
 'Vont a-biou deoc'h, n'eur zini glaz :  
 Mirakl' ma n'oc'h ket lazet c'hoas.

*na pe*

<sup>3</sup> gen mantrus ~~■~~ ar stourmad ! *(na pe gen mantrus ar stourmad)*  
 Ho sabren dirr a zo leun-c'hoad ;  
 Ho penn, ho taouarn gouliet ;  
 Var ho kein dillad poultrennet.

### 4 5

N'oc'h euz ket hellet, o netra !  
 Drebi zoken eun tamm bara,  
 Gant ar brez vras, epad an deiz,  
 Da skoï a ziou, da skoï a gleiz.

rien à changer  
dans la 6<sup>e</sup> strophe

5 8

Tizet gant an naoun, ar skuisder,  
An noz n'ho rent ket dibreder :  
An enebour a zo a-ze, ~~hor~~  
Prest da lampa 'vel eul loan gouë.

6 8

Ne blegit ket, penn kalet Breiz,  
'Vit ho souten oc'h euz ho Feiz ;  
Dalc'hit mad, (<sup>(1)</sup>belek) an divez,  
Da stourm kalet ha didruez.

<sup>(1)</sup>betek

7 8

Goasket oc'h oll (<sup>(1)</sup>prizounien)  
Gant ar fallakr' enebourien :  
<sup>2</sup>(Hon) c'halounou 'vezo tommoc'h  
Hon aluzen pinvidikoc'h.

<sup>(1)</sup>(prizounerien)  
~~prizounerien~~  
<sup>2</sup>(hor)

rien à changer  
dans la 9<sup>e</sup> strophe

8 8

Breurik paour en dachen kouezet,  
Pe en hospital tremenet, ~~hor~~  
It da gemer ar gurunen,  
'Lakaïo Doue var ho penn.

9 8

Ho tud karet ni 'gonsolo  
Beuzet en ho foaniou garo  
Hag a c'houlenno deoc'h repos,  
Gant an œlez, er Baradoz.

10

'(oc'h)

Da viken(<sup>(1)</sup>ho) hano meulus,  
En hor c'haloun karantezus,  
'Vezo moulllet ken difazi,  
Evel re Jesus ha Mari.

11 12

Dioc'h barr an env c'houi a zello  
Meur-a-meur a wech ouz ho pro;  
Hag a zervicho c'hoas ar Franz,  
N'eur bedi 'vit he delivranz.

12 13

O va Jesus, pe da vare,  
A vezo fin d'hon goall huvre ?  
Ouz (<sup>h</sup>on) zoudarded truezit ;  
Roit dez-ho prim an tu gounid.

(hor)

13 14

Diskuezit ~~decomp~~, eb marc'hata,  
Eo bepred Franz ho merc'h hena ;  
Dre oll neuze ni ho meulo,  
An « *Te Deum* » a dregerno.

14 15

Ar mab a ziredo seder  
Daved he Vamm dous ha tener,  
Da boka da vleo guen he dad,  
Ha da chomm gant-han evit mad.

15 16

Ar breur a zisplego d'he c'hoar  
An euz great, gant henor ha gloar,  
He zever, eb aoun da vervel,  
Var dachen veüntrer ar brezel.

16 17

Ar priejou bet ankeniet  
N'em gavo laouen unanet ;  
Elik ar c'havel (<sup>(1)</sup>ziskuezo) (<sup>(1)</sup>ziskuezo)  
Dre eur vouse'hoarz he dad distro.

(1)

17 48

An durzunellik glac'haret,  
Gant diank he muia-karet,  
Eurus a c'hoarzo lirzin  
O welet kroaz var he beultrin.

18 48

Mez da c'hortos, var 'raok goazed !  
Dao stard var ar Prusianed !  
Evidoc'h oll (hor)pedennou ;  
Ha ma hellomp aluzennou.



DIVEZ.



Saint-Pol-de-Léon.

*rien à changer  
dans la sphère*

*l'abbé  
Le Gemp  
St Pol de Léon*

